

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

NERZH 1

Nerzh

Un anv keltiek hag a vez kavet e kerneveg, e kembraeg, nerth hag en iwerzhoneg, neart

B'ar gevredigezh gwechall e veze gwelet an nerzh evel ur binvidigezh. A-bouez e oa kaout nerzh evit kas al labour war-raok.

Herie-an-deiz an nerzh e-unan n'en deus ket kalz a dalvoudegezh hep ar spered...

Gwechall e veze lâret d'an dud evañ ur bannac'h kinkina da reiñ nerzh dezhe. Ur gwin fardet gant plantoù ha gant plusk ar wezenn ginkina e oa.



« Nerzh ar boued »

« Nerzh ar c'hafe »



http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennoueg/skeudennou_krouet_gant_Malo_Ar_Menn

« Labour dre nerzh »,
ul labour graet gant ar
c'horf

« Diskouez e nerzh »,
diskouez pegen kreñv eo

« An den-se en deus
nerzh ! »

« Kollet eo ma nerzh
ganin »,

« Adkavet 'm eus ma
nerzh »

« N'em eus tamm nerzh
ebet ken »,

« Un den e-kreiz e nerzh »

peotramant

« Un den e-kreiz e vrud »,
« Un den en e vrud wellañ »,
« Un den e bleuñv e vrud »,
un den etre 30 ha 40 vloaz

Mammennoù nerzh,
energiezhioù

Nerzh an avel

Nerzh an dour

Nerzh an heol

Nerzh an tan

Cofinancet par
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne / Avec les Fonds européens
de développement régional

Gerioù ar vuhez

RKB

▶ | Radio Kreiz Breizh

NERZH 2

« **Reiñ nerzh** » = reiñ energiezh

Nerzhañ = reiñ nerzh

Dinerzhañ, lakaat an dud da goll o nerzh

Nerzh-kalon,

youl d'ober un dra bennak

« **Gant nerzh-kalon 'vez graet kalz a draoù** »

« **Dre nerzh** » = dre heg, gant feulster

« **Ober gant al loened
dre nerzh pe dre zouster** »

« **Gwelloc'h eo ober dre zouster gant al loened
kar al loened a dalc'ha soñj** »

Ar re gozh a blijed dezhe labourat deus ar beure
a-raok nerzh an deiz :

« **Nerzh an deiz** », pa vez tomm tomm an amzer
war greiz an deiz

« **N'on ket 'vont da labourat war nerzh an deiz** »,

« **Keit 'vo kouezhet nerzh an deiz** »

Dinerzh,

un den ha n'en deus tamm
nerzh ebet ken

Nerzhus,

un dra, un den hag en deus
nerzh

Nerzhder

= rusted, kreñvder

Nerzhed,

un dra efedus, rust

« **A-nerzh** », ar c'hreñvañ,
ar gwellañ posubl

« **A-nerzh e gorf** », lakaet
en deus tout e nerzh evit
ober un dra bennaket

« **Pa vez kistion
d'ober berzh
eo gwell finesa
evit nerzh** »,
gwelloc'h eo bezañ fin
evit
bezañ kreñv

COFINANÇE PAR
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne / Avec les Fonds européens
de développement régional